



# CHANSON

## CLOAREC PEMPOUL.

Var un ton superb.

**E**NTRE q̄eric Pempoul hac stang an Abbaty  
Eus eur C'hloarec yaouanq o poursui e studi,  
Hac en deus composet eur zon d'e vestres coant,  
Evit e bassetans ha decor tud yaouanq.

Divar menez Crec'h-Noa, pa vezàn em repos,  
Me a ell hep fazia contempli eiz paros :  
Kerilly, hac Yvian, Perros ha Lanviniec,  
Plourez, ha Plourivo, Plounez, ha Plorennec.

Ouspen e contemplan ar pèvar elemant :  
Ar môr gant e lestri e costez al Levant,  
An douar er c'huz-eol fructifiet gant poan,  
An ær a zious va fenn caëroc'h evit an tan.

Ouspen e remerqàn costez tri dioces :  
Sant-Briec, ha Treguer, ha Dol hep tromplerez,  
Extremite Bro-Saos ha Rouantelez Franç,  
Hanvet scol ar vertuz, cabinet ar sianç.

Noblançou a blezanç, decoret a goajou,

Qestel, ha tiez-goard carguet eus a armou,  
 Enezennou fertil, antouret gant Neptun,  
 Hac havrou frequentet var o zro zo commun.

Ma ve libr va lagad, en deffe plijadur  
 D'ar c'houls n'apparis mui map ena an natur,  
 O velet ac'hane mouvamant an êvou,  
 Sclêrijen ar stered hac ar blanedennou.

Goechal, pa voan disqib d'Aristot ha Platon,  
 N'en devoa va speret nep satisfaction,  
 Nemet o vedita var levriou ar sianç,  
 Ous o c'honsideri n'em boa qen passetans.

Amzer avagpep tra, n'en deus mui a charmou,  
 Couarner ar galon am dalc'h en e lassou :  
 Eur pech zo en Pempoul zo re grén a ressort,  
 Am dalc'h da languissa en despet d'am oll effort.

Recalet oll adrén, rareteou Crec'h-Noa,  
 Noc'h eus mui a bouvoar da reid'am c'halon joa;  
 Er guæric a Bempoul ema va flijadur,  
 Eno ma va Mestrez, eur guenet dreist-natur.

Calliop, Polymni, Terpsichor, Erato,  
 Urani, Melpomen, Euterpe ha Clio,  
 Ha c'houive, Thali, c'hear feun' eus a farnez,  
 C'houi arvar an doueque invoc ec'h adres.

Exocit va feden , jenitor Jupiter ,  
 Quitait an dezert hac antreit en qær ;  
 C'houi a voar an doare , quitait prompt ho plaç ,  
 It da gaout va mestrez , grit din antren e graç .

Secondit Cupidon da essât he gounit ,  
 Ous e rebellion implic'h da oll gredit :  
 Gra dezi va c'haret qement ha me c'haràn ,  
 Pe laqi da zêvi guenén er memes tan .

Poursuiv anei erfin , lavar dei , Immortel ,  
 E deus e Keriti' eur servicher fidel ;  
 Represantet dezi e zon prest da vervel ,  
 Mar qendalc'h da veza em andret qer cruel .

Mercur , ambassader , tad ar sperejou mat ,  
 Messajer eloqant , cass dezi va mennat ;  
 Digor da ziou esqel ha nij prompt dre an ær ,  
 Hep tenna da halan , disqen ebars en qær .

Abord-hi em reqet , gra dezi compliment ,  
 Sesi dre ræzoniou ha dre gomzou charmant ,  
 Ha tenn eur cedulen qent retorn var da c'his ,  
 Sinet em avantach gant an dorn am languis .

Mæs mar chomse hepret en he ompinion ,  
 Digas din Lachesis , Attropos ha Cloton ,  
 Digas memes ar Maro , armet a hep gallout ;

Dre ar maro didruez da rei fin d'am hirvoud.

Erfin, bet diganti eul lincel griet mat,  
Eun arched hac eur bez evit fin va laqât ;  
Ha ma car va buez, e devezo plijadur  
Da viana d'am maro, o rei din sepultur.

Beza e deus pouvoar da gommandi d'ar maro,  
Ha me demeus va bez a savo p'am galvo :  
Me zavo ac'hane, ressuscitet gant gloar,  
Evit he admira evel un eil Lazar.

Biscoas an Ameriq, daouest d'e oll bompad,  
N'en deus guelet guenet quer caër, qen dereat  
Na biscoas an Asi, gant e oll fertilite,  
N'en deus bet product evelep rarete.

Disqen en qer Pempoul, qerz dre ru an Iliz,  
Ea tach da flechissa an objet am languis,  
Ha na espern netra er sort occasion,  
Evit gonit he speret ha rei joa d'am c'halon.

Impalaer puissant, Monarq victorius,  
Map ena an êvou, fidelite Venus,  
Laqa en he c'halon ar vir lem am blessas,  
Ma teui en ber amzer evit va ober yac'h.

Mestago ouc'h va brec'h dorn divin Appelles,  
Al liou caër em boutiq hac em pen an adres

Da denna he fortret da gas d'an Occidant,  
Da gas ebars er Sud, en Nord hac el Levant.

Eurmennat aràn c'hoas qent disqen ar Menez;  
Me a garre plijout da galou va mestrez :  
Rouanez ar Muset, o pet attancion  
Qent ma zin da repos canomp dezit ar zon.

F I N.

## CH ANSON NEVEZ,

*Var sujet un Ozac'h zo bet fouetet gant e vreg.*

*Var ton : Bretonet, d'en em divertissa.*

**C**'HOANT am be d'ho laqât da c'hoarzin,  
Pa glêfot petra zo c'hoarvezet  
Gant un Ozac'h demeus ar vro-mâ, daïc tala,  
Gant un Ozac'h demeus ar vro-mâ,  
A zo bet fouetet gant e vreg.

An den-mâ a ranqe lusqellat,  
Ha mont ive bemdez d'ar ster,  
Ha ma na blije qet an dillat, daïc tala,  
En devije bazadou leiz e ler.

Qê pront da lusqellat ar buguel,  
Squis ê va fen oc'h e glêvet,

Pe mar qemeràn eur geuneuden, daïc tala,  
Va mignon, me raï did monet.

Va fried, arabat e sachac'h;  
Monet a ràn da lusqellat :  
Cousqit aze, va mabig bian, daïc tala,  
Mar sach ho mam ne mouñ qet mat.

Yan, ret e d'ec'h sevel ar buguel,  
E domma hac e vailluri,  
Oza ar yot, qempen an ti-màn, daïc tala,  
Guelc'hi pedou ha seudelli.

Me a ya da di va amezeguez  
Da gozeal eu nebeut c'hoas;  
Preparit lein aben ma teuin, daïc tala,  
Pe otramant o po fest ar vas.

Qemerit ho plijadur, va fried,  
Me yêlo d'oc'h avertissa;  
Caout a refot pep tra preparet, taïc tala,  
Aben ma teufot prest da leïna.

Va fried, pa vo ho commodite,  
Prest e lein, trempet ar zouben;  
Me ya va-unan da zervicha, daïc tala,  
Da laqat guin en ho queren.

Yan, qeït a ma vezin e leïna,

Laqit buan dour var an tan,  
 Da voelc'hi plajou ha scudelli, daïc tala,  
 Ha podes va mabig bian.

Yan, amâ ez eus chomet souben,  
 Debrit hervez oc'h apetit,  
 Hag esqern a zo mat da grignat, daïc tala,  
 Mes na douchit qet ous ar c'hiq.

Va fried, me a esse eur banne,  
 Eur zec'het bras ameus brêmâ.  
 Qemer da veren eta, mevier, daïc tala,  
 Te ac'heus e'hoant eus a bep tra.

Mont a ra da rinça e veren,  
 Eur malheur gantàn zo c'hoarvezet :  
 Gant ar bres en devoa d'e voelc'hi, daïc tala,  
 Etre e zaouarn ê torret.

Chom a eure a gren estonet ;  
 Ma lavaras en ur greña :  
 Eur malheur so guenen aruet, daïc tala,  
 Toret ê va gueren, emeza.

Jarnicoton, eme Jaquetta ;  
 Brêmâ ni a zanso ar bal :  
 Tennit ho praguezen, va mignon ; daïc tala,  
 M'o po an disciplin ractal.

Taflica flaca a bep costez,  
 Me ho tisco da derri guer,  
 Na netra demeus an tiegez, daïc tala,  
 C'houi oar erfat an traou zo qer.

Va fried, ho pet couzin truez,  
 C'houi laqai ar goad da redeg;  
 Me esse qent guin gant va boutes, daïc tala,  
 Evit terri gueren ebet.

Guisqit ho praguesen, va mignon,  
 Hac it da rinça ar pôd-se :  
 Divoallit na dorfac'h davantach, daïc tala,  
 Netra ebet en ho pue.

Qenta tra a dori en ti-màn,  
 Me a grogo ous bleo da ben,  
 Ha memes tra ous da ziouscouarn, daïc tala,  
 Qen na zeuint qeit ha re eun azen.

Diouzin-m'eta, goaset yaouanq,  
 Tachit da blijout d'ho craguez :  
 Diouallit na viot re vechant, daïc tala,  
 Pe e viot fouetet couls ha me.

FIN.

---

E Montroulez, e ti LÉDAN, e ru ar Vur.